

Disoc'hoù Haiku 2017 – An hent – le chemin.

Bugale

1-'barzh ar c'hoad
tadig ha mammig a-dreñv din
ha me dirollet da c'hoarzhin
Rafael, 2yezh Rozko.

2-Ti menaj ma zad
laouen e-barzh an traktour
war hent al loened
Malo, 2yezh Kawan

3-Daou valigorn
ouzh gwerenn an oto –
daou hent lufurus.
Chloe, Diwan Kemperle.

Krennarded

1-Hent du hent bleiz
hent diluget
klask a ran ma hini
Anne, Skolaj Plijidi

2-An hent oc'h astenn
roudoù ma suizhder –
va c'hroc'hen o roufennañ.
Angèle, Skolaj Plistin

3-War hent abred
ar c'harr boutin o vont war-raok
betek ar skolaj daonet,
Marzhin, Skolaj Plijidi.

Tud deuet

1-War hent ar vered
chuchumuchu chapeled
an ivinenn gozh.
Annaig Kervella

2-Ma bizied o flourat
talmöù da galon
klask ma hent war da groc'hen.
Gwenvred Latimier-Kervella.

3-Paotred dilabour
fraost greantel ha douar fraost
dirazomp an hent.
Alexis Hié.